


# ANGELUS

## ITRON VARIA A LOURDES



War don : *Un Archel a beurz an Otro*

An Angelus zone dar c'hreiz de  
Evit enori mam Doue,  
Pa tisken ar Werhez santel  
Voar roc'hel vraz Mazabiel.

### DISKAN

Mari rouanez an Envo  
Gant Jezuz karget a c'hraco,  
Leromp d'hei oll avoerz huel,  
Meulodi d'ar Woerchez santel.

Mazabiel te zo evruz,  
Voarnout he tisken mam Jezuz,  
Kaer evel an eol binniget,  
Bolz an Ev gant e oll steret.

Dorn he èl mad kaz anezi :  
Gant diou plac'hic a voa ganti,  
Bernardet a klaske keunet ;  
Paour a voa a vado ar bed.

Ar gave gant poan deuz tremenet,  
Eun drouz ha deveuz klevet :  
Mam Doue a zeu da zisken,  
Dre drue deuz ar becherien.

Eur bar aoel deu deuz an Ee  
Pa ma tiskenaz mam Doue,  
Bernardet sav he daoulagat,  
A kerkent e voelaz skler mad.

Dous ha tener voa e zello  
Skeuden an oll vadelezo,  
Eur goabren guen-tan he dongue  
A voa kalz kaerroc'h 'vit an de.

He zae gwen a voa groet en Ee,  
Hac e c'houris a voa ive,  
Voar he zreid voa daou vokat-roz  
Diwoanet barz err Baradoz.

Karantézuz voa da voelet,  
Ma re d'he c'halon joaustet  
Dré eur c'hoerz douz dezi laret;  
« Oh na kemerit aon abet »

Enn he dorn eur chapelet gwen  
A fivoe grenen a grenen;  
Ar buguel ive leun a fe  
Komancas kercent he Ave.

Beuet a joia voa he c'halon  
A zouster a zevotion,  
Pa tafeas joia an evo  
O voelet mam an oll c'hraco.

Dont eure enni e unan,  
Ar bed neuze kafe bian :  
Kueu vraz dezi euz e chuitaat  
Elec'h ma nem gave kenmat.

En noz na c'halle ket kousket,  
Pa sonje er vam biniget,  
Hast vraz dezi ma vije de  
Da vont d'he goelet adarre.

Oh mam ar bed lez da vugel  
Ma chai choaz da Vazabiel  
Da wëlet un Itron a gaeran,  
Vel na voeler ket er bedman.

Ken ker e he zur da voelet  
Ma ëe he speret trubuliet  
Me renk adgwelet anezi  
A gout petra a vank dezi.

Elic ar bed kerz ta buan  
Nachom ket da tennan da helan  
Ket voar kavet mene Tabor  
Eno e kavi da Tensor.

« Itron vad d'he-me lavaret  
« Petra diganen a choulet  
« Ni zo ho servigerezet  
« Ho polonte a vezo groet. »

« Aman teufet pad pemzeede  
« Me laro dec'h ma bolonte  
« Ha goude vo fin do pue  
« E vefet evruz barz en Ee. »

Bemde teufomp a wir galon,  
Mez tud ar bed zo diraison  
A dro bepret voar an tu fall  
Ar pezh a vad ra ar re all.

An dud disket gaf da laret  
Voar obero goellan ar bed  
Ar gaou zo trec'h dar wirione  
Pa na c'heuiller lezen Doue.

Itron vad trist braz ho kavan  
Ze lak ma chalon da voellan :  
Itron leret petra dober :  
« Pedit Doue vit ar pec'her.

« Pedit vit an oll bec'herien  
« Zo koéet hen defaligen  
« Mar tistroink voar zu Doue  
« Ma sauvetefoink ho ine.

« Aman fel din a ve savet  
« Eun Iliz vrao ha kaer meurbet,  
« Ma teui tud gant devotion  
« A bep tu en prociission. »

Diw veaj e teu hep he goelet,  
Bernardet devoa poan speret  
Pa ver er boan ac hen anken  
Tud ar bed a zeu d'ho dispen.

Hi gwelet a ra adarre,  
A ma tridas korf ac ine.  
An diou plac'hic a lar dezi :  
« Tol dour biniget voarnezi. »

Dour biniget ra dei choarzin,  
Ac asten e diouvrec'h Divin,  
Da diskoel voa a beurz Doue  
Da laka evruz ar wugale.

Itron vad dime lavaret  
Petore hano ha douget  
« En evo me a zo Itron »  
« Imaculet Conception... »

Neuze ar joa en he c'halon  
Ha karget a zevotion,  
E lar dann holl en gwirione  
E devoa goelet mam Doue.

Da chortoz monet do welet  
En Ee da Palez an drindet,  
Da Lourdes ni chai a vandenno  
Eno man pen hent an Evo.

Bemde teuer a vandenno  
A bell a bevar chorn ar vro.  
Ar c'hiri tan zo re vien  
'Vit hon chemer oll a venden.

Gwerc'hes en heur euz hon maro  
Hon charget oll euz ho krasso  
Deut gant ho torn madelezuz  
Dhon sikour da vont gant Jezuz.

#### DISKAN

Mari Rouanez an evo  
Gant Jezuz karget a c'hraso  
Ni gano oll a voez huel  
Meulodi dar Woerc'hes santel.

Amen.

Y. HERNOT.